

Daoust-hoc'h e ra ar Wask pe eul ar Wask ar meno foran e-barzh anfezh Dreyfus ar menno foran e hollad c'hredennoù , sav-poennoù ,
muiañ rannet en ur gevredigezh

Oberour Dreyfus:

Ganet eo e Monako ar c'homadant Ferdinand Forzinetti e 1839 hag eo un ofiser gall liammet get troioù-kaer an afer Dreyfus...Derc'hel a Ferdinand Forzinetti get e garg ar-lerc'h e leve hag e resev c'hoazh, d'an 29 a viz Genver 1897, un testeni eus perzh ministr ar Brezel a-benn trugarekaat anezhañ eus e gemer perzh e komision ar reolennoù e-keñver servij ar Justis milourel. Pa d'eo kelaouet eus e zarempredoù get ar re evit Dreyfus eo tennet dezhañ e gargoù d'ar 16 a viz Du 1897. Testeni eo e Roazhon evit Dreyfus hag eo chalet da welet stad fall korfel Dreyfus goude ar prantad truez(grâce). Bamet eo bet da welet Dreyfus en deus ket bet biskoazh ger kasoni ebet a-enep d'e vouevien « jamais un mot de haine pour ses bourreaux ». Mervel a ra e Monte-Carlo e 1909.



Oberour enep Dreyfus

Ganet eo Godefroy Cavaignac e Pariz d'an 21 a viz Mae 1853, mab Eugène Cavaignac. Un den politikel gall eo, meur a wech ministr ar brezel. A-enep emañ da azgwel ar prosez hag e ya e-barzh strollad an enep Dreyfus , é tifenn talvoudoù an arme. D'an 7 a viz Gouere 1898, dirak an deputeed, en em ziazeziñ ar tri diell o dehe daspaket ar c'holonel Hubert Henry ha sañset da brouiñ en doare diflach kablusted Dreyfus, e kadarn evit sur kablusted homañ. Gervel a ra Cavaignac ,eta, d'an 30 a viz Eost 1898, ar c'holonel Henry hag e anzav bout en em renket « voulu arranger les choses » é oberiañ ar pezh a zeuio « ar faos Henry ». Goude emlaziñ ar c'holonel e tal'ch an drouksourer. Chef ar gouarnamant Henri Brisson a asant goulenñ azgwel prosez Dreyfus. Emañ Cavaignac a-enep hag e o zielez e-pad adgwel ar prosez. Arouez ar vroadelouriezh dehoù gall eus fin an XIXe kantved eo Cavaignac unan eus ar re gentañ é kemer perzh e Ligue ar Patrie française e 1899. Mervel a ra e Flée e 1905

3 blez a-raok e oa bet an degradiñ hag an deportadur eus Alfred Dreyfus hag eo rannet Bro C'hall e daou du abaoe e gondaonadur. Embannadur al lizher « J'accuse » eus Emile Zola er c'hazetennoù d'an 13 a viz Genver 1898 a ya da vevaat en-dro ar speredoù hag adlañs an afer. Diskouez a ra ar lizher-mañ rol an dud lennek en afer peogwir eo souezhet ar c'hallaoued get al lizher-mañ hag a vod ar re evit Dreyfus dirak fulor ar re a-enep Dreyfus hag a zo rediet begata evit adkemer an tu. Dibaot eo an doare da skigniñ, embann ul lizhet sinet ha ken hir dre gazetennou eo risklus, riskl da gaout kastizoù pounner met e c'hell tizhout Bro C'hall a-bezh get al lizher-mañ. Ken heuliet eo an afer e Bro C'hall hag e dek-kement ar gazetenn « l'Aurore » ar moullerezh betek 300 000 skouerenn eus al lizher.



L'Aurore eo ur gazetenn gozh gall, pemdeziek, republikan krouet get Ernest Vaughan, embannet eus 1897 da 1914. Embannet e oa eus 20 da 30 000 skouerenn bemdez betek vreadenn vrudet eus Emile Zola « J'accuse » hag a voull 300 000 skouerenn pemdeziek. Skeudenniñ a ra ar gazetenn-mañ mennozhioù sosialourel hag eo ur gazetenn meno. Ar pennad-stur-mañ zo bet skrivet get Valentine Frédéric Godefroy.

E-barzh hec'h embann ez eus ur sell madelezhus ar an darvoud hag hervez an oberourez eo nobl hag enorus lizher Zola. Displegiñ a get al gazetenn ez eus kalz a dud eus an emsav kristen hag a zo enep- Dreyfus hag e embann n'eo ket koupabl Dreyfus peogwir eo ar c'homadant Esterhazy kablus. Ober a ar gazetenn ar meno foran.

Le Réveil Bônois, savet get Maxime Rastail e 1890 embannet teir gwech ar sizhun, e Bône, en departamant Constantine en Aljeria. Ul linez –stur eus an tu dehoù eo , memes faskouriezh, aotrouniek, mirelour ha kilstourmer, enep-yuzev. Meur a wech ne veze ket sinet ar pennadoù kazetenn embannet E-barzh ar pennad emañ spontet get breutadenn Zola hag eo bet termenet evel « infâme » hag ivez « Dreyfus est le vrai coupable » . Komz a ra Rastail eus « un infâme complot » . Adkemer a ra titouroù eus kazetennoù all. Rastail eo ur flemmskridour, barzh met ivez "un véritable paladin de la presse«




Flemmskeudenn eus Édouard Pépin (e anv gwirion Claude Guillaumin), « La Vérité », eo embannet d'an 19 a viz Kerzu 1897 e-barzh ar gazetenn republikan flemmg Le Grelot. Emouestañ a ra ar gazetenn evit difenn ar c'habiten Dreyfus e-barzh ar flemmskeudenn-mañ. Kroget eo an afer abaoe 1895 peogwir eo krog kablusted Dreyfus da vout lakaet en arvar. Emañ an dresadenn-se evit lennerien ar gazetenn. Ur vaouez, get ur melezeur en he dorn , alegorienn ar Wirionez, zo é klask mont kuit ag ur puñs. Met daou zen zo é tougen pep hini ur mougerig-gouloù a servije d'ar mare-se da lazañ ar gouloù-koar. Unan eus ar re-se eo un den barvek get lunedoù , getañ ur mougerig-gouloù, skrivet arnañ anv e gazetenn La Libre Parole. Édouard Drumont eo é klask lakañ gouleier ar Wirionez. Unan all zo treuzwisket e strobinieller get un tokarn skrivet anv ar gazetenn L'Intransigeant, e penn-kentañ e oa ur gazetenn eus an tu kleiz met eh ae ar-zu ar boulañjerezh ha mennozhioù eus an tu dehoù hag a-enep Dreyfus.

Ar pennad-mañ zo a-enep ar re evit Dreyfus hag ar « Médiocratie » , da lâret eo ar gazetenn kevezerezh , La Démocratie Algérienne eus Dominique Bertagna, breur ar maer eus Bône. Skeudenniñ a ra Bertagna evel « scribe ». Skeudenniñ a ra ar gazetenn, Le Réveil Bônois, ar meno pemdeziek peogwir e vez difennet an arme hag ar gouarnamant eus an Ille Republik met e vez burutellet maer Bône é implij ar ger « mediocratie » da lâret eo tud dister o c'hallaoued. Lakaat a ra ivez en arvar komzoù Zola, é implij ar gerioù « Zola a diffamé l'armée et la nation » Heuliañ a ra ar gazetenn ar meno foran peogwir e oa d'ar mare-se al lodenn vras eus an dud a-enep Dreyfus.



Victor Henri de Rochefort-Luçay eo ar strobinieller , rener an embannadur, L'Intransigeant, hag a zo é stankifn objektivenn ar lunedenn implijet get ar justis soudardel. E troad ar soudard ez eus ur sac'hig skrivet arnañ anvioù Dreyfus hag an hini kablus gwir : Esterhazy. Dreyfus zo bet kondaonet en doare disforan (huit clos) met an diskuliadennoù eus ar c'holonel I Picquart a-dal 1895 a c'hell herzel (appréhender) ar wirionez.. Neoazh e chom dall ar justis milourel daoust mard 'eo stanket al lunedenn. Get ar sac'hig-se e oar ar justis piv eo an hini kablus evit gwir met e souet dianavezout kablusted Esterhazy a-benn gwareziñ enor an arme, memes mard eo en anv an disjutsis. Dirak an enep-Dreyfus , partizanet ar wirionez, get anvioù skrivet ar ar sac'hig douget get an den en eil renk zo é klask savetiñ ar Wirionez : ar senator elzazad Scheurer-Kestner, Émile Zola hag ar gazetenn Le Figaro. Daoust d'o strivoù he deus ar wirionez poan da darzhañ: « Finira-t-elle par sortir » eus puñs an obskurantism. Er prantad kentañ ez eus ar vaouez a zo é kuitaat ar puñs, goude an holl enebourien eus ar wirionez hag er fin an difennerien. Pep den zo flemmskeudennet, treset evit mont re-bell eus an afer . Oberour ar flemmskeudenn a foat dezhañ diskouez ar wirionez eus an afer Dreyfus. Evitañ an den kablus eo Esterhazy , ket Dreyfus. Pal an dresadenn-mañ eo lakaat an dud da gemm ali.



Flemmskeudenn eus Emile Zola embannet e-barzh dastumadeg « Musée des Horreurs » eo hag eo pell-tre eus flemmskeudennou hengounel ar maread-se. Klask a ra an oberour Victor Lenepveu diskouez doc'htu piv eo an dudenn treset é tresiñ korfoù heugus. Kinniget eo E. Zola e stumm pemoc'h er plagaod n° 4 hag A. Dreyfus e stumm un naer er plañchod n°6 , a-benn lakaat ar re evit Dreyfus e pantheon an euzhvilved, « le Musée des Horreurs » . Degas a ra an dresadenn eus Zola un doare-hudurezh (scatologique) : azezet eo e-barzh an nev(auge), ar yo'h un nebeut eus e romantou, da skouer « Germinal » hag « Assommoir » é wisponat get « kaoc'h etrebroadel » kartenn Bro C'hall hag a zo ar mampmvr. Ar ger « etrebroadel » a brou levezonoù fall an estrañjour. Ster an dresadenn zo sklaer: Zola ne skriv ket e oberennou hag e sav anezhe en doare nebeutoc'h nobl. Hervez an oberour lizher « J'accuse » hag oberennou all eus Zola a zo é lousaat skeudenn Bro C'hall en estrenvro. Gellat a ra ar flemmskeudenn-mañ bout gwir evit an enep-dreyfusard met e gwirionez eo faos. Lousaat a ra ar flemmskeudenn-mañ enep-dreyfusad. Evit gwir Zola a zo é tiskulilhañ ar faziennou(bavures) justis a-benn savetiñ un den didamad. Diskouez a ra ar skeudenn-mañ tu politikel enep-dreyfus ha enep-yuzev ha pal dezhi eo bout efeedus, izelaat an den hep arguzenniñ hag aes da gompren. Ar Wask a ra ar meno foran peogwir eo an hini kentañ é skigniñ an titouroù hag he deus kalz a levezon. Hi a c'hell kemm an titouroù hag ar c'heleier hevez he c'hoant ha faziñ (errone) ar c'heleier a-benn klokaat get he sav-poent politikel. Skignet eo an titouroù-se e Bro C'hall a-bezh hag ar lenner a soñjo eo gwir ar c'heleier-se ma fiziañs er c'hazetennoù-se ha muioch c'hoazh mard eo boazet da lenn ar gazetenn-se pe mard eo tost d'ar sav-poent politikel-se.

